



# KANTIK

EN HENOR

DA ITRON VARIA AR MOR



Var don : *Kantik Beg ar Raz.*

**Diskan :**

*Guerc'hez, Rouanez an Arvor,  
Roit ho pennoz d'an dud a vor !  
Pedit, pedit ho Mab Jezuz  
Da veza ouzomp truezuz.*

1.

Hor micher-ni a zo henvel  
Ouz micher goz an Ebestel ;  
Ni eveldho a rank poania  
Er mor da c'honit hor bara.

2.

Choazet hon euz eur goall labour ;  
Nag a zanjeriou var an dour !  
Mes gant ar Verc'hez benniget  
En danjer e vimp diouallet. .

3.

Pa 'z omp tolet ha distolet  
Dre nerz avelou dirollet,  
Beillit varnomp, o Mamm dener,  
Hon diouallit diouz ar reier.

4.

Goulen a reomp ive, Guerc'hez,  
Ma teui da vad ar beskerez,  
Ma c'hellimp, divar hon labour,  
Digass d'hon tud eun tamm sikour.

5.

'Vit plijout d'ho kalon a vamm,  
Ni ho pugale vo divlamm ;  
En hon touëz grit ne vo mui  
Na labour sul, na mesventi.

6.

Bemdez e larimp hor peden,  
Bep sul e klevimp oferen,  
Ha morse ne jomimp re bell  
Heb tostât ouz an dol zantel.

7.

Pa zeui hon devez diveza,  
Ni ho ped, Itron Varia,  
Deut da sturia hon eneo  
Betek porz euruz an Envou.

---

**Imprimatur :**

*Quimper, le 24 Janvier 1905.*

ÉM. FLÉITER, *Vic. gén.*